

BROUSTOÙ

Gant Bibar

Live : Aes

Handelv : -

Lañvaz : GNU/GPL

Staliañ ur broust e-barzh GIMP.

Evit implijout ur broust nevez gant GIMP, lakait restr ar broust en teuliad-se :

~/.gimp-2.2/brushes/ ma implijit GNU/Linux pe reizhiadoù UNIX all,

C:\Documents and Settings\Utilisateur(user)\.gimp-2.6\brushes\ evit reizhiadoù Windows.


C:\Users\Utilisateur\.gimp-2.6\brushes gant Windows 7.

Goude-se, adloc'hit Gimp a-benn bezañ evit implijout ho proust, pe klikit war «adkargañ» e-barzh prenestr ar broustoù.


Krouiñ ur broust diwar ur skeudenn

Evit krouiñ ur broust diwar ur skeudenn eo ret amdeñ anezhi d'ar mentrezh .gbr.

Digorit neuze ar skeudenn gant GIMP.



Klikit war «Restr», dibabit «Enrollañ dindan» hag enrollit ar skeudenn evel ur broust GIMP, e mentrezh gbr.



BROUSTOÙ

Gant Bibar

Live : Aes

Handelv : -

Lañvaz : GNU/GPL

Da c'houde, pegit ar restr gbr-se en teuliad **Brushes** evel displeget a-us, ha prest eo neuze ho proust nevez da vezañ implijet !



Plijadur deoc'h !